



## **Kevratoù skoazellet : an distro-skol en arvar Un diskoulm diouzhtu ! Diwan a c'halv an dud e Kemper hag e Naoned Disadorn**

Diwan a zo ur rouedad kevredigezhel a 46 skol, 6 skolaj hag 1 lise o pourveziñ ur c'helenn laik ha digoust dre soubidigezh e brezhoneg. D'an 29 a viz Eost, hervez an enklask bet kaset war raok er skolioù ez eus 207 den, 141 diouto o vezañ dindan gevrat skoazellet.

War an 141 :

- 51 a zo bet krouet pe adneveset a-raok diviz feuls ar gouarnamant da chom a-sav ganto,
- 45 implij da grouiñ pe adneveziñ zo dija nac'het,
- ha 39 a zo en arvar ; an deizadoù adneveziñ oc'h erruout er sizhunvezhioù o tont.

66 den zo implijet dindan gevrat didermen kalz diouto o vezañ bet kroget gant kevratoù skoazellet.

**84 implij en arvar en distro-skol.** Ar fed vez nac'het ar c'hevtratoù skoazellet a vir ouzh ar skolioù da duta an implijoù ret evit o mont en-dro : diwallerezh, kantin, skoazell skol vamm. Da skouer : digoradur ur skol nevez e **Plougastell-Daoulaz** en distro skol a zo bet posupl a drugarez da labour ur skipailh a youl vat gant skoazell Diwan hag an ti-kêr evit al lec'h skol. Nac'hadenn an 2 implij skoazellet goulennet en devo ul levezon grevus en dazont.

Hervez ar c'heleier diwezhañ e vefe kadarnaet gant ar gouarnamant lod eus an implijoù skoazellet dreist holl en deskadurezh evit an AVSed hag ar skoazell d'ar vugale gant diaesterioù. Padal en hor skolioù eo an holl bostoù liesseurt tro-skol ha postoù AVSed eo hag a zo bet nac'het.

### **Emgav Disadorn 2 a viz Gwengolo 10e30 plasenn ar Resistañs e Kemper ha dirak Prefeti Naoned**

evit goulenn groñs :

- **E vefe an implijoù er skolioù divyezhek laik dre soubidigezh er renk kentañ hag e vefe aotret an implijoù skoazellet evit Diwan** o vezañ o kas war-raok ur c'helenn a servij publik hep kaout peadra da gas war-raok he labour.

Hor skolioù a rank goulenn kevtratoù skoazellet dre ma n'eo ket posupl kaout muioc'h a arc'hant foran gant al lezenn evel m'emañ bremañ. Bez e c'hellomp gwelout avat ez eus muioc'h a gevtratoù didermen lec'h m'eo kreñv skoazell ar galloudoù lec'hel.

→Pa oa Emmanuel Macron war ar renk e miz Ebrel 2017 e skrive "ouzhpenn bezañ anavezet el lezenn e vo kresket ar skoazell d'an idantelezhioù rannvro hag aesaet e vo an deskiñ yezhoù ha sevenadurioù lec'hel er vro".

- **E vefe an deskadurezh divyezhek er yezhoù rannvro embarzhet er program barregezhioù ha stummadur a vo lañset gant ar gouarnamant war lerc'h an hañv.** Ret eo gouzout ez eo evedus ar stummadurioù e brezhoneg evit kavout ur vicher.

- **Un emdroadur lezennel evit ledanaat d'an holl skolioù divyezhek melladoù al lezenn NOTRe (7 a viz Eost 2015) evit pezh a sell ouzh skodenn ar c'humunioù.** Gant kement-mañ e c'hellfe ar skolioù kinnig kevtratoù didermen d'ho implijidi.

Diwan a zo a-unan gant enkreuz ar c'hevredigezhioù, galloudoù lec'hel pe tud implijet tizhet gant diskar an implijoù skoazellet. Diwan a c'halv an holl dud stag d'an treuskas brezhoneg en deskadurezh ne vern peseurt hentenn o vezañ dibabet gant ar familhoù da gemer perzh niverus en emgav e Kemper ha Naoned evit goulenn un diskoulm bremañ evit ingalded an holl vugale.



## **Emplois aidés : la rentrée en danger Une solution maintenant ! Diwan mobilise samedi à Quimper et à Nantes**

Diwan est un réseau associatif de 46 écoles, 6 collèges et 1 lycée qui met en place une scolarité gratuite et laïque et un enseignement en immersion en breton. L'enquête réalisée dans les écoles indique au 29 août, que les établissements emploient 207 personnes dont 141 en contrat aidés. Sur les 141 :

- 51 ont été renouvelés avant le gel brutal et violent décidé par le gouvernement,
- 45 emplois à créer ou à renouveler sont déjà refusés
- et 39 sont en danger, leur renouvellement arrivant dans les semaines à venir.

Par ailleurs, ces écoles emploient 66 personnes en CDI, provenant pour bon nombre d'entre elles de contrats aidés ayant été pérennisés.

**84 emplois menacés à la rentrée** - Les refus de contrats aidés empêchent les écoles de pourvoir aux recrutements nécessaires à leur fonctionnement pour l'accueil garderie, la cantine, les asem en classes maternelles. Par exemple, l'école de **Plougastel-Daoulas** ouvre à la rentrée, grâce à la mobilisation d'une équipe bénévole pendant deux années, avec le soutien de Diwan et de la mairie (locaux). Le refus de valider les deux emplois aidés sollicités risque d'avoir de graves conséquences.

Selon les derniers éléments, le gouvernement validerait certains emplois en contrat aidé, notamment dans l'Education nationale concernant les AVS et le soutien aux élèves handicapés. Or, les emplois dans nos écoles concernent des postes variés nécessaires au fonctionnement des écoles et plusieurs postes d'AVS Diwan ont déjà essuyé un refus.

### **Le réseau Diwan donne rendez-vous samedi 2 septembre, à 10h30**

- **place de la Résistance à Quimper & devant la préfecture de Nantes**

Pour exiger :

- **Que les emplois des écoles bilingues laïques immersives fassent partie des priorités du gouvernement et que les contrats aidés soient débloqués pour Diwan.** En effet, Diwan assure une mission de service public de l'enseignement, sans bénéficier des moyens nécessaires pour accomplir cette mission.

Nos établissements sont contraints de recourir aux contrats aidés, parce que le cadre juridique actuel les exclut des financements publics. D'ailleurs, nous observons que les établissements Diwan bénéficiant d'un bon soutien public local embauchent davantage en CDI.

→ Alors qu'il était candidat en avril 2017, Emmanuel Macron écrivait : « Outre une reconnaissance juridique, les moyens de l'expression des identités régionales seront accrus, ainsi sera facilité l'apprentissage de la langue et de la culture locale dès l'école ».

- **Que l'enseignement bilingue en langue régionale soit considéré dans le plan de compétences et de formation que le gouvernement lancera à l'automne.** En effet, les formations bilingues en breton sont reconnues pour leur efficacité en termes d'insertion professionnelle.

- **L'évolution du cadre juridique, notamment pour étendre à tout l'enseignement bilingue les dispositions de la loi NOTRe (7 août 2015) concernant le versement du forfait scolaire.** Cette disposition permettrait aux écoles de proposer des contrats pérennes à leurs salariés.

Diwan s'associe aux inquiétudes des nombreuses associations ou collectivités et personnes touchées par cette suppression et appelle tous les citoyens soucieux de la transmission de la langue bretonne aux enfants dans l'enseignement, quelle que soit la filière choisie par les parents à participer au rassemblement de Quimper et Nantes samedi 2 septembre, afin de demander une solution maintenant pour l'égalité de tous les enfants.